

Frankiz – Kevatalded – Breudeuriezh
REPUBLIC C'HALL

**GWAREZIÑ AR VINORED
HA
KASTIZAÑ AR VEZVIDIGEZH DIRAK AN HOLL**

**(Lezennaoueg ar Yec'hed foran, mellad L. 3341-2
ha diferad etremistrel eus an 20 a viz Kerzu 1996, K.O. eus an 31 a viz Kerzu 1996, p. 19683**

GWAREZIÑ AR VINORED

DEGEMER AR VINORED EN TAVARNIOÙ

Arabat eo degemer en tavarnioù minored dindan c'hwezek vloaz n'int ket ambrouget gant o zad, o mamm, o c'hulator pe nep den en tu-hont da driwec'h vloaz en deus karg anezho pe a evesha warno.

Koulskoude a c'hall ar vinored ouzhpenn trizek vloaz bezañ degemeret en tavarnioù zo un aotre rummad kentañ ganto, ha pa ne vefe den ebet ouzh o ambroug.

SERVIJAÑ AN EVAJOÙ

Evañ war al lec'h :

1° An evajoù dialkool, hag int oc'h ober rummad kentañ an evajoù, a c'hall bezañ gwerzhet pe roet evit netra d'ar vinored dindan c'hwezek vloaz da vezañ evet war al lec'h.

2° An evajoù eus rummad kentañ hag eus eil rummad an evajoù hepken a c'hall bezañ gwerzhet pe roet evit netra d'ar vinored etre c'hwezek ha triwec'h vloaz da vezañ evet war al lec'h.

Evajoù da gas gant an nen :

An evajoù eus rummad kentañ an evajoù hepken a c'hall bezañ gwerzhet pe roet evit netra d'ar vinored dindan c'hwezek vloaz da vezañ kaset ganto.

KASTIZAÑ AR VEZVIDIGEZH DIRAK AN HOLL

1° Arabat eo gwerzhañ dre ar munud, WAR DERMEN, diouzh ar werennad pe diouzh ar voutailhad, evajoù eus an trede, ar pevare hag ar pempvet rummad da vezañ evet war al lec'h pe kaset gant an nen.

2° Arabat eo gwerzhañ dre ar munud, WAR DERMEN, diouzh ar werennad pe diouzh ar voutailhad, evajoù eus an eil rummad da vezañ evet war al lec'h.

3° Arabat eo d'an davarnourien lakaat ur minor da evañ betek ma vo mezv. Ouzhpenn-se eo arabat dezho reiñ da evañ da dud zo anat warno int mezv pe o degemer en o stal.

An neb a ya a-enep an diferadennoù-se eus Lezennaoueg ar Yec'hed foran a c'hall bezañ kaset dirak al lez-varn.

Kaset e vo ivez dirak al lez-varn an neb a vo kavet mezv-splann en un davarn, ul lec'h foran all pe war an hent.

Heñvel dra gant an neb en do distrujet pe roget ar skritell-mañ.

RENKADUR AN EVAJOÙ

Kentañ rummad. – Evajoù dialkool en tu-mañ da 1,2 % alkool.

Eil rummad. – Gwinoù, bieroù, sistroù, sistroù-per, chouchennoù, gwinoù dous naturel dindan reol tailhoù ar gwinoù, likorioù kastilhez-du, chugoù frouezh pe legumaj go dezho etre 1,2 ha 3 derez alkool.

Trede rummad. – Gwinoù dous naturel estreget re an eil rummad. Gwinoù likor, evajoù digorkalon diwar gwin ha likorioù sivi, flamboez, kastilhez-du pe kerez dindan 18 derez alkool rik.

Pevare rummad. – Romoù, razasoloù, alkooloù diwar strilhañ gwin, sistr, sistr-per pe frouezh n'eus ket bet ouzhpennet esañs enno, ha likorioù termenet gant al lezenn eus ar 27 a viz Mezheven 1957.

Pempvet rummad. – An holl evajoù alkoolek all.

(Diferad etremistrel eus an 20 a viz Kerzu 1996)

MINISTREREZH AN ARMERZH
AN ARC'HANT HAG AR GREANTEREZH